

KANTIK

DA ZANT TUGEN



Ton Kelven pe ton: Breudeur, ni glev ho klemmou.

1.

Etre parrez Eskibien ha parrez Primelen,
Dem-dost da barrez Goulien ha da barrez Kleden,
Zo savet eur chapel gaër, hag eunn tour braz meurbet,
Enn enor da zant Tugen, sant Tugen benniget !

DISKAN

Henor, gloar ha meuleudi, doujans ha karante
D'hon Tad-Abad, evuruz, kurunet gant Doue,
Henor, gloar ha meuleudi d'ann Aotrou sant Tugen,
D'hor Patroun karantezuz, meuleudi da viken !

2.

Iliz Sant-Tugen savet gant hon tud-koz guech-all,
A laka ar c'halounou gant ar joa da dridal.
Ar vein-daill zo kizellet hag holl dantelezet,
Ann tour karre ha ledan a zo kaër da velet !

3.

Patromou ann Ebestel, ann Avielerien
A veler dudiuz-braz e chapel Sant-Tugen,
Kempennet ha kizellet labouret-brao-meurbed,
Renket endro d'ann iliz, hag endro d'ar porched !

4.

Koant eo patroum Sant-Tugen, var he benn zo eunn tok,
Enn he zorn-deou eunn alc'houe gant eur vaz a Eskop,
Harz he dreid eur pardouner, o pedi daoulinet
A zo bet, dre eur burzud, diouz eur c'hi diouallet !

5.

Kaer eo guelelet er chapel endro d'ann aoter-vraz,
Aoter splam hag alaouret, Itroun-Varia-C'hraz,
Aoterik santez Barba, aoter ar Rozera,
Gant skeuden sant Dominik ha santez Thereza !

6.

Brudet ha darempredet eo chapel Sant-Tugen
A-leiz a belerinet zeu di gant goulouen,
A zeu di da bardouna gant feiz ha karantez
Ha da bedi a galoun sant Tugen ann Alc'houez !

7.

Guelelet a rer d'ar pardon gouriz-koar ha goulou,
Benniga a rer er chapel niver braz a alc'houeou ;
Douget gant devotion, ann alc'houeou bihan
Ho deuz galloud da zifen diouz binim ar chas klan !

8.

Da zeiz pardon Sant-Tugen, kalz a belerinet,
Gant ar chapeled enn dorn pe goulou benniget,
A ra teir zro d'ar japel, o vale diarc'henn
Enn eur bedi kalounek ann Otrou sant Tugen !

9.

D'ar zul araok gouël Sant-Iann da genver miz Even,
A rer, bep bloaz, ar pardon e chapel Sant-Tugen,
Deut eta, poblou kristen, niveruz, d'ar pardon,
Gant kroaziou, gant banniellou, hag e prosesion !

10.

Var bouez ober er chapel eur gommunion vad,
Pedi evit ann Iliz, Hon Tad Santel ar Pab,
E c'hounezer d'ar pardon ann induljansou braz
Dre veritou Hor Zalver, zo maro var ar groaz !

11.

Ar chapel zo bet savet e kichenn ar mor glaz
 Enn enor da zant Tugen a ra burzudou braz,
 Burzudou var ann douar, burzudou var ar mor
 E kenver tud ann Argoat ha bugale Arvor !

12.

Ia, braz eo ar burzudou a zo bet c'hoarvezet
 E kenver tud ha loëned enn amzer dremenet.
 Galloud Aotrou sant Tugen zo ker braz a guech-all,
 Goulennomp hag hor bezo, hirio, burzudou all !

13.

Salud ! Aotrou sant Tugen ! salud ! ô tad santel !
 Sellit ouz ho pugale diredet d'ho chapel,
 Sellit ouz hon ezommou, klevit hor pedennou,
 Sellit ouzomp gant truez, roit deomp hor goulennou !

14.

Difennit ar Vretouned, Bretouned Breiz-Izel,
 Deut aman da bardouna, euz a dost hag a bell,
 Kreskit enn'ho ar guir feiz, ar guir relijion,
 Ha roit dez-ho, evidoc'h, eur guir devotion !

15.

Difennit al labourer, sant Tugen benniget,
 Euz pep drouk, euz pep anken hen diouallit bepred !
 Difennit tud ha loëned diouz ar chas kontammel,
 Hag eneou ho pugale, miret diouz ar pec'het !

16.

Diouallit ar martolod pa vo var ar mor braz,
 Beillit var he vatimant pa dremeno ar Raz,
 Beillit var ar pesketour, var he vagik dister,
 Goude peskerez founnuz ho digassit d'ar guer !

17.

Roit ho pennoz d'ann Iliz, bennoz ive d'ar Franz !
 Da anaon ar purkator goulennit dilivrans,
 Goulennit d'ann den dallet ar c'hras a sclerijenn,
 Ha d'ar pec'her kaledet ar c'hras a binijenn.

18.

D'ar vugaligou vihan roit ho pennoz ive,
Digassit d'ez-ho furnez ha karantez Doue !
Grit d'eo ober joausted hag ho mamm hag ho zad,
O veza dous sentuz ha mad da labourat !

19.

Da zant Tugen, meuleudi hag anaoudegez-vad !
Gant hon Tad trugarezuz, ni vezo paët mad ;
Arok kuitaat he chapel hirio ni lavararo :
« Kenavo ar bloaz a zeu, sant Tugen, kenavo ! »

20.

Pa zeui hon heur diveza, ni bed ho madelez
Da obteni deomp beza plaset gant ann Elez,
Gant ar Zent hag ann Elez e Barados Doue,
Tost d'eoc'h, Otrou sant Tugen, hed ann eternite !

N. B.



Imprimatur :

Quimper, le 18 Mai 1894.

F. CORRIGOU, *Vic. gén.*